



PARDON GWENGAM

Kantiko en enor d'Itron Varia Wir-Zikour

Kantik Itron Varia Wir-Zikour

CANTIQUE

(Troet en Brezonek)

DE

TON : *Salut à toi*

Zalud d'Ec'h, o Gwerc'hez vinniget :
Pa deu warnomp ar gouloude,
E teuomp d'Ho pedi, Mam garet,
Da ginig d'Ec'h hon c'harante !

DISKAN :

Chilewet hon feden-a-galon,
Mam, c'houi eo bepred hon rikour,
Bezel ewit biken hon Itron,
Itron Varia Wir-Zikour ! (*diou eech*)

Mam ar graso a deu eus Doue,
Diouz ar pec'hed hon diwallet,
Goulet na vo kamet hon ine
Gand e roud mezuz mastaret !

'Wit ho pugale, bet an difen,
O Mam dener, 'kreiz ar brezel ;
Bet o Frovidanz en peb tachen,
Breman, ha pa vo ret mervel !

Ha neuze evel gras diweza,
'Wit'momp peuch' an eternite,
Gret er bed-man, 'lec'h 'tremen peb tra,
'Vo peurbaduz hon c'harante .

Notre-Dame de Bon-Secours

Salut à toi, Vierge bénie :
Quand va disparaître le jour,
Nous venons te prier Marie,
Et l'offrir encor notre amour.

REFRAIN :

Ecoute ce cri de notre âme,
Mère, à toi nous avons recours ;
Toujours pour nous sois Notre-Dame,
Notre-Dame de Bon-Secours (*bis*).

Mère de la divine grâce,
Du péché sauve tes enfants ;
Que jamais sa honteuse trace,
Ne souille leurs coeurs innocents.

De tes enfants sois la défense,
Tendre Mère, dans les combats ;
Sois leur visible Providence,
Maintenant et jusqu'au trépas.

Et puis, comme dernière grâce,
Gage de l'éternelle paix,
Fais que dans ce monde où tout passe
Notre amour ne passe jamais.

Y.-M. G.

*bris l'ouest
du breiz
maquis
Lézard, en bretagne*

PARDON GWIR-ZIKOUR

(D'AR BELERINED)

TON AR C'HANTIK GALLEG : *Salut à toi*

Ar zadorn arok ar zul kentan
 A viz goueren, e ve gwelet
 Pobl en Gwengam deut da bardonan,
 Ha da bedi o Mam garet !

DISKAN :

D'he forched koz deut c'hoaz er bla-man,
 Evel ma leue ho tud koz ;
 Deut c'hoaz Bretoned da bardonan,
 Ewit kat graso ha bennoz ! (*diou vech*)

Rak en oabl e welomp'koumoul du,
 Pouner ha dare da strakal !
 Hag en hon bro, siouaz, a bep tu,
 Ar fall, an dizurz dishual !

Deut da c'houlen bean skoazellet,
 Ewit gallout miret 'n ho kreiz,
 Ar fe gristen keit'-zo grouiennet,
 E-barz kalon bugale Breiz !

C'houi, gant an oad, er boan, daoubleget,
 Deut d'hunvreal er baradoz ;
 Ar Werc'hez, a gred d'in, na ro ket
 Gwelloc'h bennoz 'wit d'an den koz !

Tado ha mamo, ho peuz ive
 Reuz da-vad, ha tribuili meurbed,
 Deut da c'houlen digant Mam Doue
 Chom divlam ha kristen bepred !

Deut c'houi, dreist-oll, yaouankizo Breiz ;
 Da bedi Itron Wir-Zikour,
 Rak er bed e zo kuzet a-leiz
 'Wit ho tapout, stigno treitour !

Da heul, deut ive, barzed kristen,
 Da c'houlen digant ar Werc'hez
 Ma vezò bepred skeltr ho telen,
 'Wit hadan vad ha levenez !

Deut niveruz dimeus Breiz-Izel,
 Brao eo bale, krog eo an hanv,
 Daoust d'ec'h euz Gwengam da vean pel,
 Karante 'dle rei d'ec'h troad skanv.

Eun dudi e vezò d'ec'h k'ewet
 Mouez ar c'hloc'h bras a son bepred,
 O kas pel e voubou 'wit larel :
 Da Wir-Zikour deut, Bretoned !

Ha pa velet aru en Gwengam,
 Deut da zaoulinan er Porched,

Dirak skeuden burzuduz ar Vam
 A gar kement ar Vretoned !

Itron Wir-Zikour 'zo gallouduz,
 En he forched 'challer gwelet
 Pegement a dudo gwaluruz
 Ganti a zo bet rikouret !

A vein-gwen e welfet goloet
 Mogerio ar porched koz-se,
 Ha war bep min e welfet skrivet :
 Itron Wir-Zikour, trugare !

Goude, gret tro Iliz Gwir-Zikour,
 Zavet ken kaer gant ho tud koz,
 Klasket, mar keret, eur c'hovezour,
 Ha gret ar prosision-noz !

Bet an tantajo war ar blasen,
 Ma hallet, deut 'barz ar c'heur-bras,
 E tal an ôter vraz kaer ha gwen ;
 D'e gwechall, ho mam a bokaz !

Muioc'h drant 'wit mouez an evnigo,
 A gan beinde war lein ar roz,
 'Vo d'ho skouarn kân ar c'hantiko
 Kanet en iliz d'anter-noz !

Kantiko Breiz, en yez hon zado,
 Lezel ganimp gant hon zent koz,
 Ha da heul 'né mouez flour an ogro,
 O kaerau kân, ha kaeran noz !

Plijout 'ra d'ar bugel diskuan
 War varlen e vam pa ve skuiz ;
 Ken doue, Gwerc'hez, ken doue e kavan
 Tremen an noz en hoc'h iliz !

Epad ho pardon, Gwerc'hez Vari,
 Digoret ho kalon frank-frank,
 Ewit binnigan kement hini
 Ho pedo, koz koulz ha yaouank !

Arok kwiatil iliz Gwir-Zikour,
 Savel a-ust d'eun draouien don,
 Elec'h e ruilh an Treo e sour
 E kanfomp holl a greiz-kalon :

Klewet ho Pretoned, Mam garet,
 Itron Varia Wir-Zikour,
 Gwelloc'h eo d'imp mervel, ma ve ret,
 Ewit bean eun de treitour ! (*diou vech*)

AN HENT A IA DA WENGAM

TON | *Kloarek Rumengol.*
Pe Breudeur ni 'glew ho Klemmo.

An hent a ia da Wengam zo hent ar Baradoz,
 Karget a belerined bag en de hag en noz ;
 Mont a reont 'n eur ganan d'ar Were'hez meulodi,
 Meulodi da Vam Jezuz, gloar, enor da Vari

An hent a ia da Wengam zo hent ar Baradoz,
 Dre an hent-se 'tremene gweball, hon zado koz,
 Gant fe, nerz hag esperanz, n o dorn o chapeled,
 Da welet o Fatronez, Mam ger ar Vretoned !

An hent a ia da Wengam, hent ar zilwidigez.
 'Wit ar paour, ar pinvidik, dreist-oll 'wit an dud
 [kez ;
 D'an dud a ia da Wengam, Doue a ro graso ;
 An hent a ia da Wengam, zo hent ar burzudo !

Dre 'n hent a ia da Wengam, e tremen'z gwechall
 Zant Gwenole, zant Eflam, zant Briek, zant Tual,
 Zant Ervoan, zant Kaourintin ha Franseza Amboaz,
 Zantez Koupata, Seva, zent ar zentezed c'hoaz !

Dre 'n hent a ia da Wengam e kerz ar pecher kez,
 O vont da c'houlen pardon, da iliz ar Were'hez ;
 An den klanv 'choulen yec'hed, an den kam ar
 [cherzed,
 Ar paouren tammik bara, hag an dall ar gweled !

An hent a ia da Wengam a zizkwe skla r d'an oll
 N'eman ket en Breiz-Izel ar Fe o vont da goll ;
 Ar belerined a gerz 'n eur ober o feden,
 Ar varzed koz ba yaouank o son gant o zelen !

War ho telennou aur glan, zonet, Barzed ma bro,
 Zonet gant kalon ha fe, zonet meulodio :
 Itron Vari Wir-Zikour a rei d'ec'h he hennoz,
 An hent a la da Wengam zo hent ar Baradoz !

Kerzel, Breiziz, ma vreudeur, kerzel, kerzel gant fe,
 Gant an hent 'ia da Wengam, kerzel en han Doue ;
 Hent ar fe, hent an henor, ha hent hon zado koz,
 An hent a ia da Wengam zo hent ar Baradoz !

PEDEN D'ITRON VARIA WIR-ZIKOUR !

(Memez ton)

DISKAN :

Itron Vari Wir-Zikour,
 Mam vad, Mam a drue,
 Lezet da gouean an dour
 A freska an ine,
 Dour ar c'hras, dour ar pardon,
 A c'houlennoemp, herie,
 Ewit ma vo hon c'halon
 Divlam dirak Doue !

Gras Doue en hon c'halon,
 'Vefomp, o tra zouezus.
 Gwir vugale d'Ech, Itron,
 Ha breudeur da Jezuz !
 Neuze gwir belerined,
 Petra 'hallfemp goulou,
 Petra ha ne rofac'h ket
 En distro, d'hon feden ?

Goulen a reomp, Gwerc'hez,
 Ma chomo stard bepred,
 Evel an derv war ar maez,
 Ar fe ar Vretoned :
 Miret d'hon bro he gizio,
 He yez 'vel n'eus hini,
 Gret ma vo 'n hon gwazio
 Goad kristen o virvi !

Hon zikouret da vezan,
 Kristenien pen-da-ben,
 Kristenien hep marc'hatan,
 Dre oll, en peb tachen ;

Divlam ar gerent bepred,
 Kristen ar vugale ;
 Neuze peuc'h hag evrusted
 A deuoù hep dale !

Gret ma vo Doue karet
 En oll diegezo,
 Ha ma vo darempredet
 Ganimp an ilizo.
 Gret ma vo miret ar c'hiz
 Da vont war ar beio,
 'wit laret : *De Profundis*,
 En koun an dud varo !

N'ankoeet ket, o Gwerc'hez,
 Penoz, aboe pell-pell,
 Ech oc'h da Vreiz Rouanez,
 C'houi hag ho Mam zantel,
 Ho-liou, bezet he skoazel,
 Miret ar vretoned
 Eneb ar re 'ra brezel
 D'ar gwir, d'ar lealded !

De ho pardon braz, Gwerc'hez,
 Dastumet 'n hoc'h iliz,
 N'hon deuz holl nemet eur vouez,
 Mouez gwir vugale Breiz,
 Nemet eur vouez 'wit laret :
 Gwerc'hez mam da Doue.
 Breiz-Izel kristen miret
 Gant hec'h holl bugale.

Y.-M. G.

KENAVO GWENGAM

TON : *Kantig ar Baradoz*

Kenavo d'id, Gwengam,
Kenavo d'Hech, ma Mam,
Gwir-Zikour vinniget,
Mam vad ar Vretoned !

Kenavo d'ec'h, Porched
Leum a belerined,
Daoulinet o pedi
Ar Were'h sakr, Mari !

Kenavo d'ec'h, iliz
Zavet gant tudo Breiz
Ken kaer hag en enor
Rouanez an Arvor !

Kenavo zent ma bro,
Mignoned un Otto,
Kenavo zant Visant
Patron an dud yaouank.

D'ec'h, Franseza Amboaz
Kenavo 'laran c'hoaz,
C'houi, hon dukez zantel
'Renaz war Vreiz-Izel.

Kenavo ... kwitat,
Gwerc'hez, meuz kalonad,
Frailha 'ra ma c'halon ;
Kenavo ma Itron !

Kenavo oter vraz,
D'ec'h ma mam a bokaz
Pa deuaz d'ho pedi
Wid'on Gwerc'hez Vari.

Kenavo Kloch Gwengam.
Ogro o son ken flam,
Zederet ma c'halon
Ouz ho klewel o son.

Kenavo, mogeriō
Iliz ar burzudo.
Kenavo d'ec'h palez,
Palez kaer ar Werc'hez !

Kenavo leur ho ti,
Toulet ouz ho pedi,
Gant an daero glebiet,
Daero pelerined !

Kenavo d'id baniel,
Baniel kaer Breiz-Izel
Baniel bepred divlam,
Baniel Gwerc'hez Gwengam !

Ha c'houi, pelerined,
Ben bla 'vo tremenat,
Kenavo !... hep dale,
En Baradoz Doue !

Kenavo, dont 'rin c'hoaz,
Da vla d'ho pardon braz,
Rouanez an Envo,
Kenavo, kenavo ! ..

Mad da voulan :

Plussulien, an 23 a viz Mae 1908.

Y.-M. AR PENNEC

Vikel-Vraz

